

Meurriad

#39

BANNOÙ-TRESET
HA C'HOARIOÙ !

NICOLBY • BALAN • PHIL • MORINIÈRE/CHOUIN/TAREK • MAREK
LOL • AURELIENH • MORVAN • SANGLA • LE DORVEN

Roi de Bretagne

Stal vras
porzh kenwerzh
Brest

Holl verkoù
brudetañ Breizh
war ouzhpenn 500 m²

Arz ar boued

Dilhad mor

Arz an daol

Levrioù, pladennoù

Pesketeraezh sport


Stal delwennouigoù
ha kement zo ...



Aezet e vez pep pech en hor stal-hou-labour,
fardet ha livet goude. Troadet m'eo auzh an hengoun
eo an dilhad breizh kinniget.

FIGURINES & COLLECTION
**Roi
de Bretagne**
COLLECTOR FIGURINES

www.roidebretagne.com



HB
HENRIOT
Faienceries de Quimper

SAINT-JAMES ♦ COTTEN
♦ TERRE & MER
♦ BLUE-WILLI'S
♦ ARMOR-LUX
♦ GLOVERALL
♦ ROYAL-MER ♦ EIDER
♦ LA MAISON DU KABIG
♦ COLUMBIA-NAVY

P
aes ha digoust

10 h - 12h
14 h - 19 h
bomdez
nemet d'ar sul

Roi de Bretagne

12, kae ar Maltouterezh ©02 98 46 09 00


12, quai de la Douane

(Coop ar besketaerien gwechall - Ancienne Coopérative des Pêcheurs)

PORZH KENWERZH

PORT DE COMMERCE 29200 BREST

www.roidebretagne.com



mi6by

Div gambr. Chom a ramp un nebeud devezhoù.

Dizoleiñ bro a fell deoc'h ?

Dres. Gweladenniñ ar vro.

Yaro, sell un tamm 'ta !

tec'ho dre toennou sikouret gan torfedourie diaur e ch enklaskeri an aotrou komiser diskreiz c'hazet er vizaouerezh em eus un den teir danj

Metsello. Setu aze unan ha na gemer ket morse a vakansoù.

Anavezout a rit trioù-bale kaer d'ober er vro ?

Ma... Kastell Trevez. Brudet -mat eo er vro. Ret eo heuliañ ar wenedenn-bale.

Antronoz vintin, abred...

N'ouzon ket ha dibabet hon eus ar gwellañ devezh evit mont da vale.

Spered fall ! Ne santez ket an aer fresk o'n em silañ en da skevent, ur gwir blijadur.

Ul latar tev oc'h en em ledañ war ar vro. Rankout a rafe steuziñ evit lezel ar plas, goude merenn, da brantadoù tom-moc'h hag heoliekoc'h.

Ha diouzhtu-dak e selaouomp "Is your heart break inside", Mintinvezh laouen deoc'h holl.

Amzer a gollimp gant ar c'hozh latar daonet-mañ !

SWING OH BABY

Gorrekoc'h ! Kastell-Nevez, war an tu kleiz.

O Gast !

Tomm eo bet deomp !

KASTELL NEVEZ

KASTELL NEVEZ

KASTELL NEVEZ

Reizh eo pep tra. O tegouezhout emaint.

FOSTERS



Klevet peus an trouz-se ?

Arabat dit bezañ ken nervus ! Lâret vefe eo da veaj kentañ.

Arabat dit disoñjal. Gouzout a ra mat an holl dorfedourien e vez distrujet an holl vadoù ez-otomatik.

Gant ma vez pouezet war an nozelenn-mañ.

Re bouezus eo ar c'hargad-mañ. Sklaer eo an urzhioù. Arabat deomp kemer an disterañ riski !

Piv a riskife e vuhez evit ur vadezad ludu ?



Ha petra an diaoul eo se ?

AAH



Boullc'hurun !

Petra eo se ?

Metsello ! Eñ an hini eo, hep mar !



Tapomp se buan !



Mallozh 'Toue !



Ereit anezhañ. Gwiskañ a ran e zilhad.

Ha goude e ramp diouzh an degouezh !

Hasta, te ! Ne vanke nemedout !



AWENA

studiu medisinerez e bro VIETNAM

Awena, peseurt studioù a gasit da benn ?

E Skol-veur Medisinerez An Naoned emañ o studial. Er pevare bloavezh emañ ar bloaz-mañ.

Ha liammet gant ar studioù eo ar veaj emañ o paouez ober ? Penaos ?

Ya, liammet eo gante. Dibabet hon eus ober hor mad eus ur veaj dreist-ordinal a seurt-se evit deskiñ un tamm muioc'h diwar-benn ar medisinerez. Setu perak hon eus dibabet labourat un tamm e ospital kêr Ho Chi Minh.

Petra e oa ho labour du-hont ?

Goulennet e oa bet ganeomp ober ur seurt enklask diwar-benn ar mod d'asaat d'ar babigoù

pa 'z int ganet re abred, peogwir ez eus traoù disheñvel bras e bro-Vietnam diouzh amañ... Gwelet hon eus ivez peseurt ezhommoù a zo du-hont evit ma c'hellfe ar skipailhoù staliet en Oriant degas ar pezh a vank dezho, pe apreñtiñ ar stummadurioù ret evit mezeien ar vro-se.

Pelec'h e oac'h o chom e-pad an daou viz-se ?

En ostalerioù e oamp herberc'het (rak ar mod nemetañ aotreet gant rejim politikel ar vro eo). Met ur gwir familh hon eus kavet seul gwech, e pep ostaleri, peogwir e vez holl dud ar familh o chom er memes ti a-gevret gant an ostizion. Ar prizioù n'int ket par kennebeut da re Bro-C'hall (marc'had-matoc'h eo un

ostaleri e Bro-Vietnam eget un dachenn gampiñ ur steredenn dezhi e Breizh!)

Peseurt diforc'hioù brasañ a zo etre ar mod da veañ du-hont hag an hini a gaver amañ ?

Disheñvel penn-da-benn eo mod bevañ ar Vietnamiz !! Ar souezhusañ a zo, sur, penaos e vez an holl familh o chom asambles en un ti (ar vamm-gozh, ar vugale vihan...). Ar maouezed a vez o chom er gêr d'al liesañ evit ober war-dro ar boued hag ar vugale, tra ma vez he gwaz o labourat er-maez... Met an dra-se a zo krog da cheñch e kreiz kêr Ho Chi Minh: muioc'h-mui a vaouezed a gas da benn o studioù ivez. Labourat a reont ivez kalz

“ (...) Sed aze ur vro o cheñch buan gant tud kalonek... ”

muioc'h eget an Europeaniz !!! Pemp devezh vakansoù hepken o devez bep bloaz met ne zeufe ket ar soñj dezho klemm rak an dra-se ! Ar feson da zebriñ a zo ivez dic'hortoz... gant bizhier, soubenn da vintin, riz da greisteiz ha da noz! Un dra c'hoazh, bemdez e vez graet ingal ganto ur c'housked 30 munutenn goude merenn (en ospital zoken e kaver ur sal evit ma c'hellfe ar c'hlañvdiourezed pe ar vedisined mont da gousket...)

Petra eo an eñvor bravañ a zalc'hit eus ho peaj ?

Marteze pa 'z omp erruet war enezenn Phu Quoc evit ar wech kentañ hag hon eus dizoloet an aodoù traezh gwenn hag ar mor glas-gwer...

Ar veaj-se he deus cheñchet ho mod da welet ar Vietnam ?

Ya, moarvat. Aet on kuit hep gouzout dre vras penaos e oa, na petra c'hoarveze du-hont. Ar pezh a ouzou bremañ: sed aze ur vro o cheñch buan, gant tud dreist ha kalonek, o labourat kalz, gant gizioù disheñvel diouzh hor reni, ur vro hag a zeuio moarvat un deiz da vezañ ken pinvidik ha broioù Europa... Merket don eo ar vro vray-se hag he fobl

gant ar brezelioù a zo bet gouzañvet ganto en amzer dremenet, met o sevel endro emaint, d'an daoulamm!

Disheñvel eo an Awena a zo deuet en-dro eus an hini a oa aet kuit ? Petra a zo cheñchet ?

Ya! Cheñchet em eus ma feson da welet ar broioù a reer "pinvidik" anezho. Memes ma n'eus ket Mc.Do ebet (ket c'hoazh...) ez eus kalz a draoù ne vez ket anavezet tamm ebet amañ hag a zo kenkoulz neoazh, a-wechoù gwelloc'h ! Ouzhpenn-se em eus desket en em ziluziañ en ur vro estren hep bezañ gouest da gompren nag he yezh nag hec'h akoustumañsoù... E komzoù berr e lârfen em eus koshaet muioc'h e korf daou viz e bro-Vietnam eget e-korf 2 vloaz e Breizh...ha desket kalz muioc'h ivez...

Peseurt ali a rofec'h d'unan en dije c'hoant mont da weladenniñ ar Vietnam ?


Deskiñ ar yezh a-raok mont kuit peogwir ez eus ur bern traoù da zizoloñ en ur gejañ gant tud ar vro! Ur wech er vro, arabat arfleuiñ, ret eo chom sioul evelto. Arabat digor ur prof dirak an hini en deus profet deoc'h, na biskoazh touch penn ur bugel...



ANY AR FUR ANY BIHAN AWENA DAD 21 BLOAZ UL LIV AN HOLL UR VRO BREIZH UR VLEUNENN TOUT AR RE O DEUS
LIVIOU BRAV UR SPORT AR SKI UL LEVR "TOUJOURS ENSEMBLE" EUS ANNA GAYALDA UN ANTOUR KEZJ HINI EBET UR
MIZ EUS AR BLOAZ MIZ MEZHEVEN UR MEUZ DA ZEBRIN AN DOD BEC'H GANT BARA FRESH UR SONEREZH A BEP SEURT
MET KENTOC'H SONEREZH ROCK

Embannit ho sonj ar CPE

Un tamm e pep lec'h e vez klevet o mouezh, er maremañ. Pellout a ra dezho bezañ klevet. Eus o dazont eo ez eus kaoz. Ha c'hwi, petra soñjit ?



"Er maremañ ez eus klot manifesta- degoù Serret eo meur a skot-veur. C'hoant o deus an dud da sturm a- enep ar CPE erit un abeg resis. N'int ket ar-du da reiñ muzic'h a c'halloud d'or batroned ha nebeutoc'h d'an dud diplomat. Marteze, gant ar CPE, e vo kavet labour buroc'h met aesoc'h e vo irez erit bezañ skarzhet."

Aline, 15 vloaz

"Me non ket ar-du gant ar CPE peogwir e kaver ez eus dija, gant ar batroned ur galloud re vras uzer an implijidi. Ha gant ar CPE e c'hellint digprañ anezho hep abeg! Hag ouzhpenn... Lavaret e vez eo bet savet ar CPE erit ma tigrekte an dilabour... Erit ar re a zo o klast labour a baez pell eo vo met... Met diaesoc'h e vo erit ar re o deus diplomou."

Lena, 15 vloaz

"Set eo ar 'c.p.e' peogwir e veze tu d'an patron kas an implijidi kuit hep paeat. Setu ma vo lakad ar re-mañ dilabour, aes-tre, hag hep kaout an gant d'an em gform, an peski a go a-enep da unnoù Mab-den."

Pol, 13 vloaz

"Ar CPE a veze dedennus ar-ualic'h ma veze an holl batroned onest ha sirus gant o micherourien. Dre was eo ar renerien eo a denno gourid eus se: bez' e c'hellint skarzhañ an dud hep abeg. Ma vez gouennet digant ar micherourien ober evrioù ouzhpenn e c'hello ar rener chom hep paeañ ar ve-mañ hag an implijidi n'o do netra da lavaret. Gwastoc'h, bez' e c'hello ur patron kinnig d'ur micherour ur CPE all, ur wech echu ar CPE kentañ. Ne vo fin ebet... Setu e vo diaes-tre dan dud yaouank krouñ ur familh pe sevel un ti."

Gwenchlan, 15 vloaz

torino 2006 or c'hoarioù olimpik

TURIN, echu eo. Brav e oa. Ha bremañ e vo dav gor- toz pell a-raok kaout c'hoarioù olimpik ar grañv war hor skrammoù.

Sonjoù lod ac'hanoc'h...

Pijus-tre e oa ar c'hoarioù olimpik. Gant ar ski free-style on bet plijet ar muññ. Met sportet on bet e vefe bet tapet tud eus Austria e-barzh un afer drammatik.

Kaurantin, 15 vloaz

Pijus e oa da sellout outa. Un afer a gant ker eo, met ne vez nemet bep a bleaz. Medalennoù aoz 'zo bet gouezet gant tud gwanec'h n'int ket auzezet betek. Pijus ha dedennus e oa sellout ouz ar re nemet rak n'eo ket betek a sport ar rener- nel etreget an feet ha Roland-Garros. Setu met eo e vefe bet sigaret ar c'hoarioù Olimpik ner div deiz.

Etienne, 14 vloaz

Alles eo en em gavet ar c'hallaoued er 4re plas, just goude ar podium. Ma'go eo bet an Alamanned ar re grenañ eo bet ar c'hallaoued mat e Gattfon: an aozur fenn eus gouezet gant ar Gattfon ha gant ar merc'heo.

Melis, 14 vloaz

9 medalenn e Turin a-enep da 11 e Salt Lake City, n'eo ket ken fall-se. Krennoc'h eo bet an Alamanned, quir eo, met n'eo ket echu istor ar c'hoarioù olimpik: bez' e vo reoù all a-benn pevar bloaz!

Etienne, 14 vloaz

9 medalenn e Turin a-enep da 11 e Salt Lake City, n'eo ket ken fall-se. Krennoc'h eo bet an Alamanned, quir eo, met n'eo ket echu istor ar c'hoarioù olimpik: bez' e vo reoù all a-benn pevar bloaz!...

Etienne, 14 vloaz

Kaoz-kaoz e oa al lod digwir, gant Gwion spleta ha simbol ar frankiz. Diskouezet diwar gant ur goulm. Ar Fenn a ziskouezet spleta Gwion ar Italianiz. Dreist eo bet gwallet ar Japaniz a c'hallit ur medalenn, unan e aozur ouzhpenn!

Ajelis, 14 vloaz

9 medalenn an holl 3 e aozur 2 e arched, 4 e aozur. Muzic'h hon dije gallet kaout met Brian Joubert an deus a-hwelat pen- da-benn ha Raphael Painet n'eo ket met erit e c'hoarioù olimpik diwezhan. Carole Modella ha deus gouezet ar-hunan gouezet e oa hag erit eo gant manes- tra! A-benn pevar bloaz, e Martez, e vo klastet ober gwastoc'h.

Karin, 14 vloaz

Lod o deus chliet penn-d- benn, evel Brian Joubert, met gant lod all eo bet digwir: Arnoine Den n'eo eo ket ar Gwion splaset erit kaout ur medalenn ha tapet erit deus unan e aozur. Marteze, a-benn 4 bloaz, e tapet muzic'h a vedal- lennoù Gwion e vo.


Gwen, 15 vloaz

CHOARIOUSUPERKOULDREISTMEGABEUZ

UR VAG LEON A SIFROU

Pep sifr a ranko kavout e blas er gael-mañ.


18-19-22-37-39-40-42-46-50-
53-57-72-83-84-98-126-189-201-
279-356-361-399-456-478-561-628-
655-785-820-829-898-1234-3245-
4210-4970-6005-6581-36108-
45428-187605-416723



PLAKENNOU MARILH

Peseurt plakenn varilh eo hini an ota zo bet laeret ?

Roet e vez dit da c'houzout :
- Sammad ar sifrou a gaver war ar blakenn ne c'heller ket rannañ dre 3 met dre 4, sur.
- Lieskementadenn ar sifrou-se a zo bihanoc'h eget 120 met brasoc'h eget 220.



- 2 ZR 48
- ANB 854
- LYX 686
- 36 KR 7
- 598 L 2

AL LOGOGRIF

Kinniget gant Joel Donnarzh

1	2	3	4	5	6	a sil ar gouloù
3	4	1	4	6		pazenn
3	1	4	6			plant dreinek
1	5	6				plant frondus
3	5					notenn sonerezh
5						kelc'h

Leugnit ar gael o lakaat lizherennoù e plas ar sifrou (Dalc'hmat ar memes lizherenn evit sifr-mañ-sifr, anat.)


CHARADENN

Kinniget gant G Delalande

1. An arzhed a ra stal eus ar c'hentañ.
2. Hep dibenn e teu an eil warlec'h 5.
3. Gant an trede e vez poblet ar bed.

PIV ON ?


AN ALUMETEZENNOU DAONET



Gant 11 alumetezenn eo bet savet ar palez-mañ. Ha gellout a rez stummañ unnek karrez, netra ken goude diblasañ 4 anezho ?


GUARD AR C'HASTELL

Pep sal a rank bezañ evezhiet mat er c'hastell-mañ. Koulskoude, ne fell ket d'ar guard ensellañ div wech ar memes sal na distreiñ war-gil kennebeut. Kregiñ a ra e droiad gant sal A :



WAR AR PIKOU

O tremen war ar pikou treset amañ e c'hellez tresan karreziou pe hirgarreziou.



Pemp hon eus gallet ober. Pet anezho e vi gouest d'ober gant 13 pik ?



AR C'HELCH DA DREIN DA SOT

E pep lodenn ez eus ur sifr, war-bouez e unan anezho. Petra a vo skrivet enni, o c'houzout :
- n'eo ket bet staliet ar stered dre zegouezh
- ar sifr "10"




OLVE-STAP



DANVEZ KALVEZ


C'hoant en deus Jonas sevel un estajerenn gant koad. Muzuliet en deus ar plas a oa etre e wele hag ar prenestr. Ezhomm en do eus :
 - 2 plankenn 40 cm a ledander war 80 a hirder.
 - 5 plankenn 40 cm a ledander war 100 a hirder.



Penaos e vo ret dezhañ troc'hañ ar plankenn evit kaout an nebeutañ a restachoù ar gwellañ ?



TARZHUS

Pet bombezenn a vo ezhomm evit leuniañ an dachenn-mañ ?



RESPONTOU AR CHOARIQOU PAVE DREISTEN NIV 38

P.12 - RANNAN PARKEIER : 3 liv vo ezhomm - AN HIRGELC'HIYOU : A=4, B=19, C=16, D=7, E= 15, F= 14, G= 6, H= 18, I=9 - AL LOGOGRIF : (1,S), (2,I), (3,N), (4,E), (5,M), (6,A) - DIVINADELL : 12 penn gwazi P.13 : GLUDEK 34 maen gludek - AROUEZIOU : A3/A5/B4/B6/C4/C5/D4 - KOD KUZH : Youn - P.14 : HA PEVAR : 44+44+4+4+4=100 - P.15 : GAEL GERIOU MESKET "Che ! Plijadur e-leizh hor bo adarre o vont da gouel an erer kozh."



AR GOULEN DROCH-MIK??

Kazh piv zo bet kollet etre broioù Russia, Kirgizstan hag Ouzbekistan ?

Respost : kazh Akhstun eo (Kazakhstan)

SOUEZHET MARV . 7



Demat, selaoerien ger ! Azo...



... emaoamp war dachenn Penharz...



... Ur match brav gant Nikolaz...



... Leun a startijenn.



MET ?! Petra 'zo ?



Gloazet eo bet Anna gant ur c'hoarier droch...



Ha bremañ e seblant bezañ ar c'hoarieren all e fulor... O tostaat ouzh an tredeog emañ Marwin.



Digredus ! Ur bistolenn a oa ganti ! Morse n'em eus gwelet an dra-se !!



Selaoerien ger... Start eo ar vuhez evit an dredeged bremañ !



Ha setu ! Graet ar jeu !



... Penati evit ar skipailh gant ar bistolenn !



ha PAL !!!



Eurus ar selaoerien met... Pebezh afer, memestra ! Deoc'h-c'hwil...



Frañs bleu Kerne !

Kevredigezh gant ar c'hloer. An Naas Dineen Kemper 2005 hag e C'healmanez Fanny CHAUFFIN.

Un istor iskis.

Emgav en doa roet Simon din e korn ur stradaed teñval. Hep distagañ ur ger e vountas ac'honan e toull-antra ur savador kozh, savet a vrik-holl. Ha me da vont d'o heul dre ar skallerioù hanter vrain. Ur wech e pevare estaj e skoas tri zo euzh un nor hag ez eus e-barzh a-raok ma vefe bet pedet. E teñvalijenn ar pezh ne welis nemet ur c'hoazh do, dastumet e gorf en ur voutenn ozh troad un daol roñt...Ur c'hoazh paz dous a lakas ac'honan da lam-mikat. D'ar poent -so eo e verzis anezhañ, en e sav e-kichen ar prenestr, paket en ur suo-kambur seiz bras. Ar memes liv gwenn en doa atav, ar memes douglagad c'hlas leun a virvilh. N'eo ket posupl, a laris war un ton klemm.

Ar wech kentañ e oa din gwelet ma zad-kozh abaoe ma oa marv, unnek miz a-raok.

- Azex, laras Simon din, en ur lakaat un dorn war ma skoaz. /Maomp o vont da zisplogañ deoc'h.

Ne ouien ket petra raen amañ. Perak e oan amañ, e bro Ejipt, gant va zad-kozh bev dirazon hag a oa sañset bezañ marv.

An istor-se a oa kroget daou viz a-raok, pa oan atav e Frانس. Ur meurvezh e oa. En ur zont en-dro eus ar skolañ, e oan aet ouzh an urzhiaoter (evel bemdez !). Aet e oan war « MSN », ur peolled evit komz gant ar vignoned war internet. Kroget 'm oa da gomz gant Anna hag Erwan, mignoned eus ar skolañ. Kroget 'm oa ivez da gomz gant un den amvet Simon. Ne anavezet ket anezhañ. Met, war a seblant, eñ, a anavezet ac'honan.

Simon : " Demat Eric ! "
 Me : " Demat... "
 Simon : " Mont a ra ? "
 Me : " Ya, ya... Mont a ra... Piv ac'h ? "
 Simon : " Va anv 'zo Simon, o chom e bro Ejipt emeon. "
 Me : " Ha perak e komzez ganin ? "
 Simon : " Ret e vefe dit dont amañ, e bro Ejipt, plijout a rafe d'az mamm-gozh gwelout ac'honout. "
 Gwir eo e rae pell 'zo n'em oa ket gwelet anezhi. Daou vloaz d'an nebeutañ. Dek miz 'zo e oa marv va zad-kozh ha n'em boa ket gallet gwelout anezhi evit an interamant.

Diouzh an noz, e-pad ar pred, em boa goulennet digant va zad hag eñ e c'hellamp mont da welet anezhi e-pad ar vakañsoù. Lavaret e deus ya. Neuze, pemtez devezh war-lerc'h, e

oan en aerborzh gant va zad ha gant ur bilhed evit "Le Caire". Mall 'oa warnon erruout! Degaset em boa va urzhiaoter hezoug. E mod-se e c'hellfen komz gant va mignoned atav.

Pa 'z omp en emgavet e bro Ejipt e oa brav an amzer, (e-skoaz e oa glav e Pariz). Mamm-gozh a c'hortoze ac'honamp war ur bank. Redet 'm eus betek enni.

" Demat mamm-gozh ! "
 " Demat Erik... Oh, pegen bras out dauet da vezañ... Pell 'zo n'em oa ket gwelet ac'honout ! "
 " Ya, gwir eo ! "

Kaset omp bet gant un taxi betek ti mamm-gozh. Un ti brav e oa. Un ti goret gant douar. E-barzh e oa brav-tre, danvez a oa forzh pelec'h war ar mogerioù, gant livioù ruz, oranjez, melen, a-wechoù mouk, livioù tamm.

Va mamm-gozh he doa diskouezet din va c'hambur. Ur gambur vev e oa, gant danvez ivez war ar mogerioù, met ar wech-mañ e oa kentoc'h livioù glas, gwer. Jourdoùl a oa ennon o soñjal e kousken aze 'pad pemtez devezh !

En em staliet e oan er gambur un hanter eur war-lerc'h ha kroget e oan da gomz gant va mignoned, a-drugaraz d'am urzhiaoter hezoug. Simon ivez a oa war « MSN ».

Me : " E bro Ejipt emeon, e ti va mamm-gozh. "
 Simon : " Dreist ! Mont a ra mat ganit ? "
 Me : " Ya, ya... War a seblant e za mat. "

Simon : " Mat e vefe en em welout dreist d'an urzhiaoter. E gwir ma 'peus c'hoant, 'gredez ket ? "
 Me : " Euh... Ya, ya... "

Simon : " Anavezout a rez Stroed ar Peoc'h ? "
 Me : " Nann, met gellout a ran goulennet digant mamm-gozh, sur-a-walc'h e ouezo. "

Simon : " Ya sur-a-walc'h... Neuze e roan un emgav dit eno da bemp eur hanter warc'hoazh. Mat eo dit ? "
 Me : " Ya, mat eo din. "

Diouzh an noz 'm oa goulennet digant mamm-gozh pelec'h e oa Stroed ar Peoc'h hag he doa displeget din.

An deiz war-lerc'h e oan eno, da bemp eur hanter. Ne oa den ebet er stroed. An oan a groge ennon. Morse n'em boa gwelet Simon. Ne anavezet ket kalz anezhañ, ha deuet e oan d'an emgav. Ouzhpenn, e oa Stroed ar Peoc'h ur stradaed teñval, gant tiez bras a bep tu, a kuzhat ar goulou. Gortezet 'm oa nebeutoc'h eget pemp munutenn pa zeuas Simon. Ijinañ a raen anezhañ yaouank a-walc'h. Met un den kozh ha tort e oa. En ur welout ac'honan e voutc'hoarzhias.

" Ha neuze, te eo Erik ? "
 " Ya, me eo. "

Seblantout a rae jenil kenañ, ha diaes e oa ijinañ anezhañ ouzh an urzhiaoter.

" Kresket 'peus kalz abaoe ar wech diwezhañ ma 'm eus gwelet ac'honout. "
 " Gwelet ho peus ac'honan dija ? "
 " Ya, met re hir e vefe da zisplogañ. "

" Perak ho peus roet un emgav din ? "
 " Peogwir en deus da dad-kozh c'hoant komz ganit. "

" Marv eo va zad-kozh ! "
 " N'eo ket ! "
 " Eo, gouzout a ran, memestra ! "
 " Daoust-hag eñ ho peus gwelet anezhañ pa oa marv ? "

" Ket, gwir eo... Met marv eo, va zad a zo aet d'e interamant. "

" Ya, met n'o deus ket kaset ac'honout. "
 " Ket... "

" Da dad-kozh a zo bev, ha c'hoant en deus komz ganit. "

Distroet on d'ar gêr, badoaet da vat. Sur e oan e oa marv va zad-kozh, met koulskoude, gwir eo n'em oa ket gwelet e gorf pa oa marv...

Emgavet e ti va mamm-gozh, em eus goulennet digant va zad ma oa marv tad-kozh.

" Evel-just eo marv ! Perak e c'houlennet an dra-se Erik ? Gouzout a rez eo marv memestra ! "

" Ya, ya, met un den a lavar eo bev atav. "
 " An den-se a zo sot da lakaat ac'honout da grediñ an dra-se ! D'am soñjal out skuzh c'hoazh gant an diforc'h euzvezhoù. Koe da gousket. "

Hag aet on en va c'hambur. Aet on war MSN ha komzet em eus gant Simon. Roet en deus un emgav all din, gant va zad-kozh ar wech-mañ.

Met ne ouien ket hag eñ e ranken krediñ anezhañ pe get. Forzh penaos, ne eo nemet un doare da c'houzout hag-eñ e oa gwir : mont d'an emgav.

Ha setu perak emeon amañ gant va zad-kozh, bev, e Stroed ar Peoc'h, met ar wech-mañ e-barzh un ti eus ar stroed.

" N'out ket marv tad-kozh ? "
 " N'on ket Erik, hend-all penaos e rafen evit bezañ amañ ? ! "

" Parak neuze o deus lavaret din e oas marv ? "
 " Gouzout a rez em eus graet an eil brezel bed. Ma... E-pad ar brezel-se ez eus bet kalz a emgan-nou, hag e-pad un emgann em eus lazhet un den... Ur general pe un ofiser, n'em eus ket soñj...

Met ret gouzout n'em eus ket goret a-ratozh lazhañ anezhañ. War al leur e oan hag em eus



tennet un taol fuzuilh n'eus forzh pelec'h, evit ma ouïfe an dud e oan amañ, ha arabat bale warnon peogwir ne oan ket marv... Hag em eus tennet war an ofiser... pe war ar general... Kregiñ a ra da beurlas. Neuze e kendalc'h Simon gant an istor:

" Neuze da vamm-gozh he deus gouezet an dra-se hag he deus bet c'hoant da skarzhañ da dad-kozh eus an ti. Met m'az piye gouezet e oa dispartiet da zad-kozh, ho piye savet goulennoù, amat eo... Neuze o deus kavet gwelloc'h ober evel ma vefe marv. E mod-se d'an nebeutañ n'ho peus ket savet a c'houlennoù. Aesoc'h e oa. "

" Ya, met mammig ha tadig a zo aet d'an interamant ! "

" Ya, deuet int amañ evit ober war-dro an afer-mañ n'o deus ket kaset ac'honout dre ma ne oa korf ebet, na interamant ebet. Ma glesket mat ne gavi marse a desteni evit lavaret eo marv da zad-kozh. "

" Mont a ran etrezek va zad-kozh hag e stardan anezhañ. "

" Ne oa ket da fazi, tad-kozh, ne oa ket da fazi... Ret eo din mont kuit bremañ met dont a rin endro warc'hoazh, d'ar memes eur. "

E ti mamm-gozh, e-pad an noz, e tiviz an mont da glask ar paperioù evit testiñ eo

marv tad-kozh. Kaer em eus klask, gwir eo, ne gavan ket. Ha ne 'z eus ket kennebeut a balfridi outañ ouzh ar mogerioù, pe war an armelioù. Evel m'he defe c'hoant va mamm-gozh disajjal anezhañ.

Bremañ ez an bemdez da welet va zad-kozh, d'ar memes eur ha gouzout a ran e ra plijadur dezhañ gwelout ac'honan.

A-benn tri devezh e tistroin e Frانس ha c'hoant em eus goulennet digant va zad hag eñ e c'hellamp a-wechoù mont da welet va zad-kozh.

" Met Erik, ne za ket mat ganit ? Marv eo da dad-kozh abaoe unnek miz bremañ ! "

" N'eo ket ! Gwelout a ran anezhañ bemdez ! "

" Kompren a reomp eo diaes dit chom hep gwelout da dad-kozh met n'eo ket posupl e welas anezhañ bemdez. E-barzh da hultireoù emañ, Erik" a lavar din va mamm, hag a lak ac'honan d'unan klavr.

" Ket ! Bev eo ! Ha n'eo ket e fazi m'en deus lazhet un den er brezel ! "

" Un trouz a zeu eus ar gegin. Va mamm-gozh eo a zo o paouez tertiñ ur werenn. Pouezet 'm eus 'lec'h ma rae poan. "

" Warc'hoazh ez aimp ganit er vered, marteze e c'helli ober da c'hañv aesoc'h. "

KELAOENN

En em c'houlenn a ran penaos e raint evit ober ur bez d'unan bennak n'eo ket marv !

War hent ar vered emgav. Mall 'zo warnon gouzout penaos e raint evit mont e-biou d'ar vered ! Setu erruet omp. Mont a reont war zu ur bez gris e marbr.

" Met n'eo ket posupl ! ! "
 N'eo ket va zad a zo o huchal an dra-se, me eo ! Dirak bez va zad-kozh emeon. Ur poltre outañ a zo, ha skrivet eo:

" Joseph Jules Abiven. D'am gwaz. Marv d'an 13/09/2004. "

N'on ket evit krediñ ! Met neuze... Piv eo an den kozh am eus kemeret evit va zad-kozh e-pad ur sizhunvezh hanter ? Ha piv eo Simon ?

Pemp eur hanter eo. Ret eo din mont da welet anezhañ. O redak betek Stroed ar Peoc'h emeon. Tost emeon. Setu, emgavet on. Pignat a ran ar skallerioù hanter vrain pevar ha pevar. Skeiñ a ran teir gwech ouzh an nor hag e zan e-barzh. N'ez eus den ebet...

Pa ziskennan, e welan pelloc'h daou zen kozh o vont kuit. Heuliañ a ran anezho... Sur on eo va zad-kozh ha Simon... Mont a reont etrezek ar vered... Dispartiañ a reont er vered... Met piv e oant ? ..

Dont a ra mamm-gozh da gomz ganin.

" Erik ?... "
 " Ya... "

" Ret eo din lavar un dra bennak dit... "

" Petra ? "

" Bremañ, pa 'z peus komzet diwar-benn un den en doa lazhet er brezel... "

" Ya ? ! "

" Un den a zo deuet, c'hwech miz 'zo, anvet Simon, hag a kontañ din ne oa ket marv da dad-kozh... "

" Ar memes tra 'zo c'hoarvezhet ganin an div sizhunvezh-mañ... "

" Ya, komprenet em boa. Gant ar souezh, em eus laosket ar werenn da billat. Krediñ a ran din e oan fall, hag estonet on bet da c'houzout e oas bet paket gant Simon, ivez. "

" Met piv eo Simon e gwir ? "

" Ne ouezet ket Erik... Ha d'am soñj ne ouezimp marse... "

DA C'HORTOZ E VEFE SKLAEROC'H AN OARL
EMAN AN AOTROU KELENNER SANTASHMOU
OC'H EVEZHAN AR C'HOD GANT E LUNEDENN
HIRWEL, SIOUL E SEBLANT PEP
TRA BEZAN, HA KOULSKOUPÉ...



RE VRAS KOFAD HO PEUS GRAET!
FIN EO BREMAÑ EO DAV DIN KAOUT
UR MEDISIN E-KREIZ AN NOZ.
PELEC'H KAVIN UNAN ?



AR C'HOUMOUL-SE!
TROC'HAN A REONT
DIN MA FLUJADUR
MA FLUJADUR
NEMET! ?



SAPPE KABELLIG
RUJZ. DELET EO
A-BENN ANEZHAN,
AR BLEIZ AONK-SE.



ANTRONOZ VINTIN... KEMERET HE DEUS IRIAL
AN HENT A GAS DA DI AN AOTROU KELENNER SANTASHMOU.
KENTELIOU ASTRONOMEZH HE DEUS DA GAOUT BEP MERC'HER
GANT HE ZAD-KOZH, ER GREZENN-EVEZHAN.



FLUJADUR
A RAO DA
DAD-KOZH.



OHE!



DAL, GALLOUT A REZ
SKOUR AC'HANON ?
ME 'GRED DIN ON UN
TAMMIG KOLLET...



O!... RE ZREIST
EO DA GI-BLEIZ.



MET EU... FAZIAN REZ PENN-DA-
BENN, N'EO KET UR C'H-BLEIZ.

UR GWIR VLEJZ EO RUFUS,
DEZHAN DENT BRAS
HA SKLFOU LEAN.
MET UENTIL EO-EN, EN !




GWELET A REZ.
SIMPA EO 'VEL
N'EUS KET DAOL.

A HA... NE C'HROZMOL KET EVEL
MA BREUR, GOUZOUT A REZ.
PA SKRABAN PENN LOEIZ E KLASK
DENTAN AC'HANON. HA N'EO KET
EVIT OBER VAN, OUZHPENN...



**Crédit Mutuel
 de Bretagne**
 LA banque à qui parler



Diskoulmoù
 Yaouankizoù

**A-feson eo
 ma bank din-me !**

* Solutions Jeunes - Ma banque elle est comme ça
 Caisse Intercommunale de Crédit Mutuel, Société anonyme coopérative de crédit à capital variable et de courtage d'assurances (pour les opérations de courtage d'assurances)
 ou garantie financière et assurance de responsabilité civile professionnelle conformes aux articles L512-6 et L512-7 du Code des assurances, 32 rue Mirabeau
 29480 Le Relec Kerhuon - SIREN 775 577 018 RCS Brest - Mars 2006

ar Porzhier

Tarek -Chouin




★ Marshall BOB ★



ENEZENN AN TASMANT J.C. BALAN



EN UN TU BENNAK A-US D'AR MEURVOR HABASK...





OK MET
DISPEG OUZHIN.
NE C'HELLAN KET
STURIAÑ KEN !

TENN AC'HA-
NOMP ALESE.
RHEBUS !

ARABAT
PENNFOLLIN...



...DAV FIZIOUT ER BINVIOLÙ STURIAÑ.
**O KAOC'H !...
MARV INT !**




WAR DANAVAAT
EZ A AR GOUMOU-
LENN. WAR A
SEBLANT.



**UN
ENEZENN!**



**DIWALL ! EMAON
O KLASK PRADAÑ
WAR AN
AOD.**



**OUF !
CHOMET
EO A-SAV !**



N'OUT KET
RE VLOÑSET ?



OLA ! NA HIR
E VO AN DRESAN...
EURVEZHIOU...



DAL NA
PEGEN ISKIS EO...

PETRA ?
PETRA
'C'HOARVEZ ?



HERVEZ AR VOJENN
E VEFE GWAREZET AN
ENEZENN GANT UR
STANK A LATAR...



DA LÂROUT EO.
E VEFEMP WAR
ENEZENN AR
VOJENN.



...ENEZENN AN TENZOR
HAG AN TASHANT
PA LÂRAN MAT!!



GRIP AL LABOUSED

YANN A. MICHAËL



embannet gant :
KEIT VIMP BEV
22, grand rue
29520 LAZ
Pgz : 02.98.26.87.12
Plr : 02.98.26.80.35
keit-vimp-bev@wanadoo.fr

Moulet gant :
OUESTELIO
505 st. Julien
de la Graviere
BP 30708 BREST
cedex 02

Rener ar gazetenn :
Yann-Fanch JACQ

Kenurzhiañ / Maketennin
Tresañ ar c'hoarioù :
Owen POHO
owen.kvb@wanadoo.fr

Tresadenn ar golo :
MAREK

Skoazellerien :
Gwen Delalande
Paskal ar Marc'heg



Niv. CPPAP : 1005 G 840 75

DARIÛS

Gilles SANGLA



Un tamm diwezhatoc'h, war ar maez.



...MÂT ED AR GWIN?

BLAZ AR BIHAN A ZO GANTAN!!

SANGLA 2006

Istorioù farsus

YANN BIJER

KOMMANANT DIOUZHTU !

KASIT HO TITOUROU BANK PE UR CHEKENN DA :

KEIT VIMP BEV

22, GD RUE 29520 LAZ

An eil pe eben ?
Deuet e oa ar paotr yaouank dirak mestr an ti da ziskleriañ e santimant hag e plijfe dezhañ dimeziñ gant ar verc'h. Selaouet e oa didrouz gant e zanvez tad-kaer hag hemañ a respontas goude bezañ tanet e gorn-butun.

— Setu a zo mat, paotr yaouank. Ha gwel-let ho peus ma gwreg ?
— N'em eus ket, Aotrou, met gant ho merc'h an hini eo a fell din dimeziñ.

War droad e-giz ar re all
E brud e eizh vloaz e oa Yannig. Deuet e oa eus ar skol d'ar gêr, hag ar paotr da vont da gaout e dad ha da lavarout dezhañ.

— Tadig, kement a draoù a ranker deskiñ bremañ e-barzh ma c'hlas, ken en deus lavaret ar mestr-skol e vo dav din mont d'ar skol gant un "encyclopédie".

— Ur "cyclo" penaos? Ha n'eus ket arc'hant a-walc'h e-barzh an ti-mañ da brenañ ur marc'h-houarn. War droad ez i e-giz da gamaladed, setu !

	DRE CHEKENN	TREUZ-VANKAN
1 GAZETENN	58 euro ar bloaz	4,2 euro/miz
2 KOMMANANT E KUB...	80 euro ar bloaz	6,5 euro/miz
3 C'KOMMANANT E KUB...	120 euro ar bloaz	9,5 euro/miz

